

# Sonit bombard, sonit biniou !

458

Komzou J. ER MARECHAL.

Ton. J.-P. DANTEC.

Job en deuz choa - zet e ves - trez, Se-  
tu int di - me - zet o daou, Se - tu int di - me-  
zet o daou, Eun ti mui - oc'h zo er bar - rez, So-  
nit, bom - bard, so - nit, bi - niou, Eun ti mui - oc'h zo  
er bar - rez, So - nit, bom - bard, so - nit, bi - niou !

## II

Vit ma vo gwarantet an ti,  
Diouz an avel hag ar bouilhard  
Ni hen harpo ouz hor re-ni,  
Sonit biniou, sonit bombard !

## III

Endro d'ezan lakomp koad fao,  
Hag an ti a vo diouallet,  
Diouz an domder ha diouz ar glao  
Sonet biniou, bombard sonet !

#### IV

Hadomp bleunvenn ar garantez  
Hed-ha-hed da vein an treuzou  
Bleunvenn ar basianted ivez  
Sonit bombard, sonit biniou !

#### V

'Vit plenat leurenn an ti-ze,  
Deomp a-vandenn gant hor boutou,  
Dansomp hanter-dro ha ride  
Sonit bombard, sonit biniou !

#### VI

Lakomp dero war an oaled  
Ha serromp kloz an holl doriou,  
Vit ma vo tomm d'an daou bried  
Sonit bombard, sonit biniou !

